

M'HO SALUD, MARI!



GUERZ ITRON VARIA AR GUIAUDET

4^e ÉDITION

Peder gwech moulet.

1909

M'ho Salud, Mari!



GUERZ

ITRON VARIA AR GUIAUDET

PARREZ LARUEN

Eskopti San-Briek ha Landreger



VAR DON : *N'en euz ket enn Breiz....*

DISKAN :

M'ho salud, Mari, Mamm Zalver ar bed,
Gwerc'hez a viskoaz ha Gwerc'hez bepred,
M'ho salud, Mari, Itron ar Guiaudet !

I

M'ho salud, Mari, lavaraz ann el,
M'ho salud, Mari, lavar ar bugel (bis).

M'ho salud, Mari... pedenn ar c'hristen,
M'ho salud, Mari... pedenn Glod Alen (bis).

M'ho salud, Mari, Itron ar Guiaudet,
M'ho salud, Mari, Mamm ar Vretoned (bis).

II

Brema daou c'hant vla, douar Laruen
Er c'hreiz hag enn dro a dridaz laouen (bis).

Eun de a viz mae, eur c'hemener paour,
Hanvet Glod Alen, den a galon aour ; (bis).

O vont d'ar vilin da glask danve boed
D'he zaouzek bugel ha d'he vreg karet,

A bede Doue gant guir garante,
A bede Mari, guir Vamm da Zoue.

Devot braz a oa d'ar Verc'hez Vari...
Bemde He fede gant oll dud he di.

III

El lec'h ma veler brema feunteuniou,
Eur wazik rede dindan a bleuniou.

Erruet eno Glod Alen 'glevaz
Eur vouez dous-meurbed o komz er eod glaz.

Hag hen da zellet : hen velaz skler-mad
Var vord ar wazik Portred ar Vamm vad.

Kerkent ar Portred frez a lavaraz :

« — It da Votoa bete 'r Person braz,

« Da gemen d'ezhan zavel eur Chapel

« Var ann douar-ma a vrema zantel,

« Enn enor d'In-Me, ha d'ann Abostol

« Karet gant ma Mab dreist ar re-all oll.

« Evit ma kredfet eo me Mamm Jezuz,

« C'houi velo hirie eunn dra burzuduz :

« Gant eur skulad vleud ho kroeg 'rei hirie

« Bevans 'vid eur zun d'hac'h, d'ho pugale. »

Glod Alen 'zentaz ; gand bleud eur skulad
Oent maget eiz de, ia, ha maget mad.

IV

— Ar c'hemener paour a redaz gant joa
Da di Gregoar Raoult, Person Botoa.

— « Otrou Person mad, ha n'ouzoc'h-hu ket,
Petra 'm euz klevet, petra 'm euz guelelet? »

Hag hen, gant fianz, lavaraz neuze
Komzou ar Verc'hez, ar burzud ive.

— Ann Otrou Person 'n c'houlaz ket kredi
Da gomz na burzud ar Verc'hez Vari.

— Mari eunn eil gwech da Glod a gomzaz;
Ha da Votoa Glod prim a redaz.

— Eunn eil gwech ive Glod oe argasset,
Ha gant ar Person 'vel eur foll zellet.

— Enn eur ouela dru Glod stard a bede,
Rag he galon baour a zaou-hantere.

« — Plijet, o Mamm vad, digas sklerijenn
« D'ann Otrou Person, 'vid gloar Laruen. »

« — It eunn daëred gwech bete Botoa,
« Ann Otrou Person a gred stard brema. »

V

— Guir 'doa lavaret Itron ar Guiaudet :
Person Botoa a oa kalz chanchet.

— Tec'het ar guelel euz he zaoulagad,
Ar Person 'bede ar Vamm dous ha mad.

« Me dou, emezhan, o Gwerc'hez Zantel,
« A vo zavet d'hac'h eur gaër a Chapel. »

Kerkent e urzaz ober prozision ;
Renet vel eunn dall eaz bete 'n Itron.

N'oa ket erru tre el lec'h binniget,
Ha 'n he zaoulagad oa deut ar guelel.

Ann oll a velaz ar burzud kaër-ze ;
Stouet d'ann daoulin e kanjont Ave !

Ann Otrou Person a velaz neuze,
A dreuz d'he zaërou, Portred Mamm Doue.

Kemer ar Portred, prim, var he galon,
Poket stard d'ezhan a reaz ar Person.

Douget oe ganthan, ar Portred zantel,
Var eur min 'zo c'hoaz dam-dost d'ar Chapel.

Ha prestik goude oe kelc'het gant koat
Eul lec'h da bedi, evid an dud vad.

VI

A bep korn a Vreiz teue kristenien
D'al lec'h santel-ze d'ober ho fedenn.

Ar pinvik, ar paour, ann den a vicher
A brofe gant joa da Vamm hon Zalver.

— Mamm ar gristenien euz lein ann Envou
A glevaz gant joa ann oll bedennou ;

Gant joa e velaz diner ar paourik,
Kerkoulz hag arc'hant pe aour ar pinvik.

« — Ma Mab, emezhi, ma Mabik Jezuz,
Ouz ar Vretoned bet karantezuz. »

Jezuz, Mab Mari, Zalver ha Roue,
C'hadaz ar grasou var bro vad Kerne.

Itron ar Guiaudet oll ho dastumaz,
D'ann dud ezommek Mari ho roaz.

Piou disrevelo ann oll viraklou
Gret enn Laruen gant Mamm ar grasou.

VII

— Eskob Perigueux, de Franchvill hanvet,
Oa Eskob zantel deuz goad Bretoned.

Kerkent ma klevaz... hag hen treze Breiz,
Evid anavout ann traou var ho reiz.

Maner Zant-Uzel a oa he leve,
Douar ar Guiaudet oa d'ezhan ive.

Ann Otrou 'n Eskob, p'en devoe guelec
Ar burzudou kaër enn Breiz c'hoarvezet,

A roaz deuz-tu he ialc'h, he galon,
'Vit zével chapel he Vamm, he Itron.

Rei a reaz ive frankiz da blanta,
D'ober prozision er goueliou kaëra.

PEDENN DA VARI

TON : *Santez Mari, Mamm Doue...*

Itron Varia ar Guiaudet, selaouet, ni ho ped,
Pedennou ho pugale, ganac'h pell-zo karet ;
Sonj mad hoc'h euz, o Gwerc'hez, pa oemp c'hoaz
[bihanik,
C'hemp d'ho pedi 'n ho chapel joentet hon daou
[zornik.

Aboe hon deuz ho karet euz a greiz hon c'halon,
Ho karout a rimp bepred, c'houi hon Mamm, hon
[Itron ;
Astennet d'ho pugale ho torn madelezuz,
Harpet hon zempladurez, hon miret da Jezuz !

Lusifer hon enebour, 'vel lion o iudall,
Noz ha de ra d'imp ann dro, 'klask hon gonid
[d'ar fall ;
Hon c'huzet enn ho kalon, Itron vad ar Guiaudet ;
Neuze daoust d'he oll ardou, krenv ni vezo bepred.

Bep bla, o ma Mamm dener, da ze kaër ho pardon,
Ar zul kenta a yiz mae me ielo gant kalon,

Gant eur galon leun a fe, da bedi 'n ho chapel
Zur da gaout ma menad drezoc'h, Gwerc'hez
[Zantel.

Reit zikour d'imp, o Mari, da dremen hon bue
Enn zervij ho Mab Jezuz, enn ho servij ive ;
Ha pa vo deut ar maro da falc'hat hon deiou.
Itron Varia ar Guiaudet, gret ma-z-imp d'ann
[Envou !!

F. R., *Person Laruen*,
Bars Itron Varia ar Guiaudet.

Itron Varia ar Guiaudet, pedet evidomp !
Ma Jezuz, mizericord ! (*100 devez induljans*).

Laruen, 10 a viz meurs 1891.

Imprimatur.

Brioci, 19 martii 1891.

M. LE PROVOST, *vic. gen.*

